





Kaniri Breiz-Izel




Dalc'h Sonj
o Breiz-Izel




Editions TONTON PHILE

Imprimerie Louis Boclé, 40, Place Thiers, Morlaix



Dalc'h Sonj o Breiz-Izel



Dalc'h sonj o Breiz-Izel deuz
an amzer Rog ma oaz gwerzet ha trec'het Pa
c'halle da vibien kerzet seder, Son o
fenn, dinec'h o spered Rog ma
oaz bet taolet heb difenn ha paour, Didan
seuliou pounner an estren Ha staget
da viken deuz e garrons aour deuz
da dreid ken tener eur chaden

Dalc'h sonj o Breiz-Izel deuz an amzer
Rog ma oaz gwerzet ha trec'het
Pa c'halle da vibien kerzet seder,
Son o fenne, dinec'h o spered.
Rog ma oaz bet taolet heb difenn ha paour
Didan seuliou pounner an estren
Ha staget da viken deuz e garrons aour
Deuz da dreid ken tener eur chaden.

Dalc'h sonj, o Breiz-Izel, deuz ar re goz
O deuz luskellet da gavel !
E peb traonien ha war griben peb roz
E klevi o mouez en avel.
An avelioug a c'houez war da blenennou
A zoug eneou ar Vretoned
Pere lavar d'id bemdez en o c'hlemmou :
Dalc'h sonj deuz da amzer dremenet !

*
* *

Dalc'h sonj, o Breiz-Izel, deuz ar Morvan ;
Deuz Nomenoë, mestr dispar,
Deuz da Rouane, deuz ar prinz Alan ;
Deuz ar Sent'deuz gret da zouar,
Deuz an Duket vad a c'houarnaz ar vro
Ha deuz hano an dud a vrezel,
Deuz Merdeidi ha Korserien Sant-Malo
A zougas dre ar bed da vanniel.

*
* *

Dalc'h sonj, o Breiz-Izel, deuz ar Varzed
A ganaz da iez dudius !
Bennoz d'ezo da iez zo beo bepred,
Beo ar Brezonek enorus !
Dalc'homp sonj, dalc'homp da viken an envor
Deuz gloarioug dispar hon c'hentadoug
Ha n'euz forz pegeid e padfe bro Arvor
Na zilezomp biken o roudoug !

J. JAFFRENOU (TALDIR).

